

TROIAD SINEMA 2022-2023  
EVIT AR SKOLIOU  
HA SKOLAJOU



DOSER EVIT AR SKOLAER HA KELENNER

<b>Fichenn deknikel ar film</b>	<b>p.2</b>
<b>Div harozez divoutin ha peuzisheñvel evit doare</b>	<b>p 3-4</b>
<b>An hengoun iwerzhonek</b>	<b>p 5-7</b>
<b>Ur ganenn d'an natur o tasseniñ gant liv an amzer</b>	<b>p 8-9</b>
<b>Hentoù pedagogel</b>	<b>p.10</b>
<b>Danvez</b>	<b>p 11</b>

# Fichenn deknikel ar filmoù :

**Titl :** Bleizi Kilkenny

**Seveniñ :** Tomm MOORE & Ross STEWART

**Senario :** Will COLLINS

**Rener arzel:** Tomm MOORE & Maria PAREJA

**Skoazeller ar sevenser :** Mark MULLERY

**Produiñ :** Paul YOUNG, Nora TWONEY, Tomm MOORE & Stéphan ROELANTS

**Renerez produiñ :** Katja SCHUMANN

**Sonerezh orin :** Bruno COULAIS

**E kenlabour gant :** Kíla

**Kanet gant :**

**Frammañ :** Richie CODY, Darren HOLMES A.C.E, Darragh BYRNE & Alan SLATTERY

**Treiñ e brezhoneg :** Mich Beyer

**Adouezhiañ e brezhoneg :** Dizale

**Mouezhioù :**

**Dasparzhet gant :** Haut et Court Distribution

**Padelezh :** 1ezh43mun

**Deuet er-maez e :** 2020

**Broiù orin :** Iwerzhon / Stadoù-Unanet / Luksembourg

**Rumm :** film bevaat

**Diverradenn :** En Iwerzhon, da vare ar brizhkredennoù hag an hudouriezh, e ro Robyn, 11 vloaz, sikour d'he zad da chaseal ar bagad bleizi diwezhañ. Met ar plac'hig 'ra anaoudegezh gant Mebh, bugel en deiz, ha bleizez en noz, e-kerzh un huadeg. Adal an deiz-se, war spered Robyn, emañ ar gourdrouz o tont digant an dud, ha n'eo ket mui eus ar bleizi.

Goude Brendan ha sekred Kells e 2010 ha Kan ar mor e 2016, omp laouen o kinnig deoc'h film diwezhañ Tomm Moore. Plijet bras omp gant e filmoù, gwriennet mat er sevenadur keltiek.

# DIV HAROZEZ DIVOUTIN HA PEURZISHEÑVEL EVIT E DOARE

Tomm Moore, dre an div dudenn bennañ, a lak daou ved da gejañ : eus un tu un Natur dizalc'h, gouez ha dizoñvus hag eus an tu all ar geoded gronnet a ramparzhioù ha renet dindan yev un diktatouriezh. Tro dezhañ da lakaat war wel an disheñvelder, an habaskter hag ar genskoazell ret evit sevel mignoniezh, ha c'hoazh hon doare da veizañ an harozezed hag an tudennoù benel, koulz en istorioù hag er gevredigezh.

## Robyn & Mebh

### div harozez o tegas preder war hon doareoù skeudenniñ

Pellik emañ hon div harozez diouzh skeudenn voas ar priñsezed deskrivet er c'hontadennoù hag en tresadennoù-bev. Div harozez divoutin zo eus Robyn ha Mebh, dre o zro-spered, o emzalc'hioù, o dibaboù hag o oberoù, met dre o zres ivez (pell diouzh skouer ar briñsez uhel he ment, moan, blev melen, fur, flour-disi he zres).

An daou sevenour a ra deomp evel-se **prederiañ war hon doareoù da veizañ ar jener**. Kerkent ha deroù ar film e reer anaoudegezh gant Mebh, ur plac'h kalon-bleiz iwerzhonat, galloudoù hud dezhi, par d'ur bleiz en hec'h emzalc'hioù hag he fiñvoù, o ruflañ hag o yudal. Diskouezet eo gant tresoù ront, kuñv, hag un tammig lezober he neuz evit pouezañ war he gouezoni. Lakaat a ra kemm mat ouzh tudenn Robyn, saozez ha kêriadez sevenaet. Evit doare e vez diskouezet deomp div dudenn gontrol, o taremprediñ daou ved disheñvel a-grenn.




Gant al lajad kentañ e vez diskouezet Robyn deomp evel un drolinenn gwenn ha du, kabellek hag o tougen un arbalastr. Aze emañ gant un argerzh derc'hel o c'hoari gant engortoz an arvesterien. Dre se e teu goulennoù dezho war an dudenn ginniget. War ar skeudenn da heul e weler un dremm voan, kognek ha dilikat, tost baskarin. Rak ur c'hoari zo war jener Robyn. Hech **anv amjener** (gourel koulz ha benel) a zegas da soñj hini haroz ar c'hoadoù hag a laer digant ar binvidien evit reiñ d'ar beorien. Ur benveg eo hec'h anv da zispenn ar c'hodoù, ar rakvarnadennoù hag hon doareoù **da veizañ pezh zo gourel ha pezh zo benel**. Klask a ra he zad addegas he c'hefridi da soñj dezhi (an hini a c'hortozer e kevredigezh an amzer-se) : kas da benn trevelloù an tiegezh er c'hastell, gwisket e-giz ma tle (sae ha boned). Hi avat a gav gwell mont da chasael gant he zad, an arbalastr en he dorn, perzh ar wazed nemetken (ne vo gwelet maouez ebet er senennoù o tiskouez emgannoù, diskar gwez, hag all...).



## Kêr ha koadeg : teknikoù disheñvel evit ragenebiñ daou spas


Gant an dorn eo bet treset ar film, da lavaret eo treset gant ar c'hreion, kement-se o reiñ un estetik kreñv hag hengounel. Damwelet e vez taolioù-kreion (linennoù savidigezh, linennoù krenet tro-dro an tudennoù a weler), pezh a zegas un neuz diaoz a-fed gwiadezh ha fiñv. Implijet eo bet an 3D evel diazez (meziant kizellerezh, evit kaout daveennoù) met ne zeu ket war wel er film peursevenet rak pep tra zo bet adtreset war gorre an 3D. Aketus-meurbet eo al labour war an endroioù, e kêr ez eo plaenaet an diarselladurioù, e-skoaz ez eus er goadeg un donder kreñv.



Liammet eo hon div harozez gant daou lec'h ragenebet o ferzhioù : Ar goadeg enebet ouzh ar geoded. Emañ Robyn o vevañ e kêr **Kilkenny** gronnet gant mogerioù gris teñval, par d'ur prison divent. **Yen** (griz, gwenn) eo al livioù implijet, **dislivet**, alese un neuz trist ha n'eo ket gwall zegemerus. Evit tresañ ar geoded o deus ar sevenourien implijet linennoù leun nemetken, **linennoù eeun, lunioù mentoniel ha rekurant** o kreskiñ ar santadur a vac'hidigezh, a reuted, a enoe. Filmet eo **war-draoñ**, gwelout a reomp ar geoded diwar-laez, peurgompez, **hep diarsell** (n'eus ket a donder). An holl elfennoù-se a ziskouez **bac'hidigezh ha tristidigezh** ar vuhez en ur seurt lec'h, hep dazont skedus. Ul labour enklask grafek hag istorel aketus-kenañ zo bet graet evit skeudennaouiñ kêr Kilkenny : gellout a reer kemer dudi dre geñveriañ ar gêr wirion hag hini ar film-bevaat.




Mebh evit he c'helo a vez o kantreal er goadeg. Diskouezet eo an natur gant **livioù tomm, splann ha flamm**. A-vat eo teknik an **dourlivadur** ivez da vroudañ an **ijin**, da staliañ **hudouriezh hag estlamm**. Stummoù **ront ha kromm** zo d'ar gwez. **Dispis eo an tresoù** hag ar poentoù-tec'hout a gas ar sell war-zu an donder. Da skouer, ar gwaregi a zigor hent **ar sell war-zu an diavaez, an anevenn**, ha kement-se a ro muioc'h a nerzh da mennozh an tec'h hag ar frankiz. Keal ar frankiz a vez penn-da-benn d'ar film : **un dachenn frank eo ar goadeg**, tra m'eo ar geoded ur prison ma vez berzet an disterañ intrudu. (evit mont pelloc'h war an daveennoù arzel s.o. II-3)




## Ur vignoniezh dreist an disheñvelderioù

Dre o darempred e ro an div harozez ur gentel **habaskter** deomp. En deroù e hañval pep tra o enebañ met dre n em zaremprediñ, **dre o c’huriusted ha dre zigeriñ o skouarn an eil d’eben** e teuint da vezañ mignonezed (en desped d’o sevenadurioù enep ha d’o disheñvelderioù). Mebh ha Robyn o deus o-div kollet unan eus o c’herent (tad Mebh, mamm Robyn), kalonek e klaskont mont dreist ar glac’har diwar ezvezant unan kar. Dre o c’hengred hag **o c’harantez evit an natur** hag al loened e tostaont an eil ouzh eben. Bez’ ez int o-div gwarezourezed ar goadeg hag an dra-se a zeuio da vezañ o stourm boutin.



Er senenn ziwezhañ e vint a-unan dre **o c’halonegezh hag o itik d’an avantur**. Hep sikour eben n’he dije ket gellet an eil saveteiñ ar goadeg na parañ mamm Mebh. Gant Mebh e tesko Robyn meizañ, « santout » ar goadeg en ur mod nevez. Ambroug a raio Robyn pa yelo houmañ da blac’h kalon-vleiz « desk bezañ bleiz », « ne z peus ket ezhomm eus da zaoulagad evit gwelout », « e-doug an noz e vez deomp ar goadeg ». Robyn a sikouro anezhi da zizalc’hañ he mamm brizoniet. Doareet int ivez gant o zro-spered **merc’hed emsavat** ha ne n em lezont ket bezañ bevennet gant statudoù raktermenet : Robyn a gav gwell chaseal kentoc’h eget labourat er c’hastell (evel aliet gant he zad) ha Mebh a zo gwell ganti lakaat he buhez en arvar evit saveteiñ he mamm eget tec’hout gant ar bagad (evel aliet gant he mamm).



# AN HENGOUN IWERZHONEK

Awenet eo ar film gant hengoun Iwerzhon, he mojennoù (amañ an dud kalon-bleiz) hag he so- nerezh. Pelloc'h eget an arz keltiek ez eo ar film awenet c'hoazh gant luskad an Disrann a Wien, gant ar c'hubism ha c'hoarzh an arz henvroat.

## Mojenn an dud kalon-bleiz : gwelout dre ar c'hwesa

Awenet eo ar film gant **ur vojenn a Iwerzhon** : ar « **wolf walkers** » (wolf = bleiz / walker = an hini a gerzh gant ar bleizi), an dud kalon-bleiz. Tudennoù faltaziek zo anezho, hanter dud, hanter vleizi. Er film e vo dantet Robyn gant Mebh ha diwar se he do ar galloud da bellgas he spered e korf ur bleiz e-doug an noz (War an deiz e vez ar bleizi o kousket hag e-pad an noz e vezont war zihun).



Gant ar film e vez dispennet **hor sell war ar bleizi gouez ha dañjerus**. Sevenet ez eus bet ur mell labour grafek evit talvoudekaat ha reiñ da anavezout skiantoù dreistordinal ar bleizi ( e-touez traoù all gwelout dre ar c'hwesa). **Ar c'hwezennoù, ar froumoù, a vez diskouezet dre linennoù kromm, ha buhez a vez roet dezho dre veur a liv**. Ar bleizi zo dezho ur vlizidigezh c'hwesa, gweled hag klevet kreñvoc'h a galz eget an dud. Dre o skiantoù e c'hellont bezañ e darempred kehentiñ kenetrezo, lakaat ar bagad da ziwall, ha kenober.



Skouer ar senenn ziwezhañ : an Aotrou Gwarezer a laosk ur yudadenn, gwelet dre froumoù o vont betek divskouarn ar bleizi hag o kemenn an dañjer dezho. Ha choazh, pa vez ar soudarded o kerzhout, e vez meizet gant ar bleizi gwagennoù o froumañ en douar ha kelaouet e vezont e c'hellfe bezañ un dagadenn da zont er goadeg.



Hollbouezus eo hor 5 skiant. Dre stimuli o tont eus an diavaez e ro deomp hon empenn da c'houzout penaos respont. Ar c'hlevet, ar gweled, hag eztaol o c'horf zo perzh eus kehentiñ ar bleizi.

- Ar c'hwesa : dre e fri e c'hell ur bleiz c'hwesa un dañjer hag e lec'hiañ.
- Ar c'hlevet : Gouest eo ar bleizi da glevout war-hed un dek kilometr. Tapout a reont yudadegoù ar bleizi all, pe un danvez preizh o tremen, pe un enebour.
- Ar gweled: gwelout a reont war 250 derez (180° evit an dud). Gwelout a reont en damc'houlouù met war an deiz e welont dispis. Ne welont ket en tu all da 30 metrad.

## Ur sonerezh keltiek meur a liv dezhañ

Ar sonaozour Bruno Coulais a ro ur sonerezh soutil-kenañ, gant **aergelc’hioù liv ar marzh hag ar marvailh dezho, met c’hoazh liv an anken, ar stourm hag ar feulster**. Evel an doare livouriezh e kendon ar sonerezh dre un orkestradur liesseurt. Gant al livioù diroll hag an niver bras a stummoù e vez ar fiñvoù hag an toniadurioù o klotañ.

C’hoari a ra ar sonerezh gant an **enebefedoù** (da sk. : kêr teñval vs koadeg voemus, Saozon vs Iwerzhoniz, tud vs bleizi, h.a...) hep na vije gwech ebet stroñsus an tremen eus ur bed d’egile. Bez’ e vez perzhioù marvailhus mesk-ha-mesk gant ar gourdrouzoù hag ar c’hontrol kement-hakement, arlivioù zo, elfennoù soutil, n’eus tamm spered tu pe du. N’eo ket c’hoari pezh an hini a ra ar sonerezh, ne ro ket o identelezh d’an tudennoù (dre from ha mouezh Robyn, ambrouget gant ur violoñsadenn varzhoniel e vezomp kaset da gompren ha da santout ar sekañs).

Evit se ez eus un **tem sonerezh er film o vont eus ur penn d’egile** hag oc’h ambroug ar sellerien a-hed an istor. Daoust ma c’heller tremen eus ur pennad burzhudus d’unan war steg e chom un tem boutin. Evel-se e tremen hemañ **dre veur a arliv**, par da **dreuzfurmader Robyn**. Ne baouez ket ar sonerezh a fiñval. Un **treuzfurmader zo er sonliv**, merzet diemouez gant ar sellerien. Evel un dudenn en em sil ar sonerezh er vandenn-son.

Adkavet e vez doare lusk ar sonerezh keltiek hag ar c’hinklerezh mod Iwerzhon dre vinvioù evel ar violoñs, ar fleüt, al lud. Kenlabouret en deus Bruno Coulais gant Kila, ur strollad sonerezh hengounel a Iwerzhon, hag evel-se ez eus bet gellet pleustriñ war **ur bed moliac’hel**, dre implij ur vouezh, ar fleüt, ha c’hoazh binvioù kenelel evel ar sutell, ar binvioù tos, ar vandolenn.

## An arz keltiek ha daveennoù arzel all

Lies eo er film mammennoù an aweniñ gweledel. Da skouer e c’heller menegiñ an **arz difetis**, ar simbolouriezh, ar c’hubism, ha c’hoazh an arz keltiek, an arz henvroat, ha levezon ar studioioù Ghibli.

Dre vras ne vez ket klasket gant an arz difetis skeudenniñ ar gwirvoud, da lâret **ar bed evel m’emañ**, met ar bed evel **ma vez santet gant an arzour**. Evel-se, ar **stummoù, al livioù, al linennoù a ro skeudennoù eus fromoù hag eus santadurioù**. A-hed ar film e red an doare skeudennaouiñ-se ha gellout a reer kemer dudi o klask heñvelderioù gant 2 luskad an arzh difetis : ar c’hubism hag ar simbolouriezh.

**Ar c’hubism 1907-1914** : Plediñ a ra ar c’hubism gant un doare da zegas an 3de ment war ur gorread plaen. Ar pal eo krouiñ un touellwel war ul lun teirmentek, dre eeunaat ar stummoù hag o diskouez diouzh meur a savpoent. Er film e kaver ar stummoù eeunaet o tont eus ar c’hubism hag ar mennozh da ziskouez war un dalenn hepken tiez kichen-ha-kichen, eus meur a gorn, evel er sekañsoù kêr da skouer. Gant ar ventoniezh hag al linennoù eeun e soñjer ivez er c’hubism.






**Ar simbolouriezh** (1880-1914) zo ul luskad arzel awenet gant ar speredelezh, an ijin hag an hunvre. Mont a ra a-enep un doare skeudenniñ realour ha naturelour. Anv zo da ouzhpennañ arouezioù kevrinus ha hud d'ar bed gwirion. Er film e kaver an daveennoù-se en doare da ziskouez an natur fonnus, skedus, leun a vleuñv. Pelloc'h e c'heller mont o lakaat keñver-ha-keñver ar mod da ziskouez ar struzh (tapisoù bleunioù leun a livioù), poltred Mebh hag he mamm (blev fonnus o pakañ an dremmoù) gant mod ober **Gustav Klimt**.



Gwelet hon eus ne baouez ket ar film da enoriñ hengoun sevenadurel hag ijin Iwerzhon. Lakaet e vez **an arz keltiek** war wel peurgetket, dreist-holl e-kerzh ar **senennoù hudouriezh** ha sorserezh : an troellennoù, drinded an Natur (dour, douar, tan), gweadegoù ar froudoù pareour e-kerzh ar breoù.

Menegiñ a c'heller c'hoazh **mentoniezh diziwezh ha sakr an natur** hag a zegas da soñj arz **ar mandala** pe an arz henvroat (da sk. : er boblad Haïda e vez diskouezet ar bevedegoù evel un heuliad elfennoù neizhiet kenetrezo).



Evit pezh eo **levezon ar studioioù Gibhli**, merzet e vez kentoc'h er senario. Tem an ekologiezh e-kalon an istor, hag **ar sell animegezhel** a zegas da soñj talvoudegezhioù Hayao Miyazaki (da sk. : Priñsez Mononoke, 1997). A-fed arz e anavezet levezon **ar skedoù livioù** o talvoudekaat an natur, gant ar pal treuzkas ur gentel ekologel sklaer : **gwareziñ an endro, hag a zo bresk**.


# UR GANENN D'AN NATUR O TASSENIÑ GANT LIV AN AMZER

Savet eo ar film war batrom ur fablenn ekologel. Dre dreuzfurmatur Robyn e bleiz e c'hellomp aesoc'h en em hevelebiñ ouzh an dudenn ha kaout ur santimant a gomprenidigezh e-keñver he c'horf bleiz nevez. N'eus ket mui ul loen gouez eus ar bleiz met ur spesad ret evit kempouez ar goadeg ha lakaet en arvar gant mab-den

## KENARROUD ISTOREL



C'hoarvezout a ra istor ar film e **1650**, d'ar c'houlz m'o doa ar Saozon (protestanted anezho) aloubet Iwerzhon (bro gatolik). Er blegenn-se ez eus un **eneberezh feuls etre Iwerzhoniz katolik ha Saozon protestant**. Bagad ar bleizi a-enep hini ar soudarded.



An eneberezh-se a vez roet da welout dre ar vugale o c'hoari hag o c'hoapaat taol-mouezh Robyn, lesanvet ganto « rouanez Bro-Saoz » ; Kompren a reer ez eus Iwerzhoniz anezho tra m'eo-hi, hag he zad, a Vro-Saoz. An aotrou Gwarezer zo bet anezhañ evit gwir, e anv e oa **Olivier Cromwell : ur saoz, galloudus hag aotrouniek**.




D'ar c'houlz-se o doa divizet ar Saozon diskar ar c'hoadegi evit gounit war douaroù nevez ; kement-se o vezañ degaset pinvidigezh vras da Vro-Saoz. Adkavout a reer an elfennoù-se er film gant tudenn an aotrou Gwarezer o kemenn da Goodfellow e vo dav chaseal ar bleizi evit ma c'hello ar goadourien pilat ar gwez, hag ar beizanted labourat an douar.



Evit gwir ez eus bet **dic'houennadur ar bleizi en Iwerzhon er XVIIvet kantved**, gant lezennoù oc'h aotreañ da lazhañ anezho. Taer-meurbet eo bet ar c'houlzad diskar ar bleizi : **e 1786 e vefe bet gwelet an hini diwezhañ**. Ar film a ziskouez an enebiezh e-keñver ar bleizi. Meur a wech e weler ur **skritell « reward for dead wolf »** staget e kêr hag o vrudañ un digoll arc'hant evit o lazhadeg. Eztaolet eo **feulster ar stourmoù gant liv ruz**, arouez ar gwad hag an tan o tistrujañ hag o kas ar goadeg da ludu.

E **Bro-C'hall** ivez ez eus bet eus ar blegenn enebañ ouzh ar bleizi. En hevelep koulz e oa lakaet kementad ar bleizi e Penn-ar-Bed e-tro 200 pe 300 bleiz. Evel en Iwerzhon, e 1800 e oa ul loen argarzhel, o c'houzañv disfiz ha mojennoù brizhkredennus : e-doug ar bloavezh-se ez eus bet lazhet 500 anezhañ e Bro-C'hall, 50 e Penn-ar-Bed. E **Breizh** e yelo diwar wel da vat ar spesad, loened aonik ha tuet da guzhat, e 1906. Padal, e miz Mae 2022 e voe gwelet ur bleiz en e unan-penn e Menez Are, un takad-bro pinvidik ar mojennoù hag ar c'hoñchennoù ennañ. Nevesoc'h zo, e miz Here 2022, e voe kavet dañvadezed toullgofet en atantoù saverien eus Lopereg, Ar Fouilhez hag An Uhelgoad. Gant ur pennad embannet gant arsellva ar bleiz (Observatoire du loup) e vo kadarnaet bezañs pevar anezho etre Brest ha Kemper, ha kement-se a c'hellfe lakaat da bosubl distro al loen e Breizh. Ha gwir eo ez eo Breizh ul lec'h degemerus evito, dre gras e struzh : koadeier ha lanneier.

## Gwareziñ annezva naturel ar bleizi



Ar film a zispak ledan temoù ekologel. Evel m'hon eus gwelet e vez talvoudekaet an natur, dinec'hus eo, meur a liv dezhi, peoc'hus ha gouez (linennoù o vont a bep tu, n'eus netra reut na krenn, n'eus ket bet c'hoazh emell mab-den). **Gwareziñ ar goadeg-se kentoc'h eget he diskar**, sed aze ar gentel ginniget.

**Pouezus-meurbet eo perzh ar bleizi evit bioliesseurtes ar c'hoadegi** : a-drugarez dezho e vez sevenet **ur c'hontroll « yec'hedel »** dre zilemel loened gwanoc'h, klañv pe aloubet gant arvevaded. Preizhourien veur anezho, e krennont war stankter poblañs o freizhoù ha gwareziñ a reont stad vat ekosistemoù ar c'hoadeier. Evel-se, a-drugarez dezho e vez digresket displeberad ar struzh hag ar c'hoadegi dre reoliata kementad ar c'harneged bras (kirvi, youc'hed, moc'h-gouez) ; pa vez dreistpoblatur gant ar re-se e c'hell bezañ en arvar kementad ar pourvez boued war un takad bennak ( kreskennoù nevez debret, diruskadennoù, efed war liesseurtes ar struzh).




Hiziv an deiz e vez c'hoazh an diforestañ e-maez kontroll ha diwar gement-se e vez direizhet-bras an natur (hin, loened, struzh). **Distrujet e vez annezvaoù boas al loened gouez, hag alese e ya spesadoù zo da get. Al loened, evit gellout dreistbevañ, a zilerc'h hag a dosta a-wechoù d'ar c'hêrioù ma vezont en arvar.**

## Fablenn Ekologel :

### Ur gentel habaskter, madelezh, doujañs ha uvelded

E plas pennañ an istor emañ an ekologiezh. Graet e vez anv enni eus **emzalc'hioù diboell mab-den e-keñver an natur hag an endro.**

An holl skoilhoù o tont da drubuilhañ peoc'h ar goadeg a vez abalamour **d'an dud hag o ostilhoù.** Emzalc'h an dud a ziskouez ur gounnar divent ouzh an natur : an heskennoù o pilat ar gwez, an tan o leskiñ loened ha struzh, ar gripedoù o kas ar bleizi da get, ar c'hontilli o skejenniñ al loened.



Gant ar film e vez broudet pep hini ac'hanomp da gompren kentoc'h eget respont dre ar feulster pe an nerzh evel ma ra an aotrou Gwarezer, pa embann « kement ha na c'hell ket bezañ doñvaet a zle bezañ rasket ». Ar c'homandour aotrouniek anezhañ ne intent ket talvoudegezh an natur ha mennet eo d'he doñvaat. Diskar a ra ar goadeg ha kiriek eo ma varv spesadoù zo. Dre an dudenn-se, ar sevenourien a **abeg mab-den, mennet da vestroniañ an elfennoù, hag e breder berrdermen.** Ganto e vezomp broudet da adkavout an douj d'an natur ha d'al loened, ha da vezañ uvel (n'omp ket galloudusoc'h eget al loened hag an natur).

Evit echuiñ, evit kizidikaat an nen hiziv d'an dalc'hoù natur e ranker pouezañ-dibouezañ ar c'horvoiñ industriel. Evit ul lodenn vras anezhañ, e teu an digoadañ da heul kresk e obererezh gant mab-den, mennet da reiñ led brasoc'h d'an takadoù annez ha d'ar gorreadoù gounezadus (chatal, legumaj, ha kement zo...)

Klask a ra ar film hol lakaat da brederiañ war hon doareoù ober hag hon emzalc'hioù e-keñver an natur, met ivez e-keñver hon nesañ. **Ur gentel habaskter, kengred hag uvelded** eo'ta, hag a vez roet deomp gant *Bleizi Kilkenny*. Adtermenet eo hor sell war ar bleizi, gwelet evel loened lakaet en arvar gant mab-den ha n'eo ket mui evel loened gouez. Penn-da-benn an istor e vez krouet ur gwir **gengred gant ar bagad**. N'eo ket ar bleizi enebourien mab-den, **mab-den an hini eo hag a vez o c'hourdrouz ar bleizi**. Ar film a zegas da soñj ne zle ket an nen kaout aon rag an dianav, an estren. Disteurel a ra emzalc'h c'hwezhet tud zo hag er c'hontrol, hor broudañ a ra da vezañ uvel, kurius, digor hag habask e-keñver ar re all, ha pa vefent disheñvel diouzhimp, kar da zeskiñ kalz hon eus digant ar re all hag an natur.

# HENTOU PEDAGOGEL

- ◇ Peseurt from ho peus bet o welet ar film ? C'hoarzh, aon, tristidigezh...
- ◇ Diwar beseurt arouezioù e c'heller lec'hiañ an istor (lec'h ha koulz) ? An dilhad, ar vuhez en ur c'hastell-kreñv, ar gweturaj, h.a...
- ◇ Pe hini eo emzalc'h an tudennoù e-keñver an natur ? Mebh ha Moll a vez e kendouez gant an natur, bevañ a reont e-kreiz ar goadeg. E-skoaz an aotrou Gwarezer a fell dezhañ chaseal ar bleizi evit kreskiñ gorread an douaroù gounezadus ha pinvidikaa Bro-Saoz.
- ◇ Petra zo kaoz eus an eneberezh etre tudennoù zo ? (Iwerzhoniz vs Saozon -> Dre benaos e ouezer kement-se ?/ Graferezh kognek vs tresoù ront)
- ◇ Penaos e vez deskrivet tudenn Robyn. Heñvel ouzh ar bras eus harozed ar filmoù bevaat? Anv-bihan, emzalc'h, dilhad, ha kement zo...
- ◇ Digant piv e teu an dañjer er film ? Ar bleizi pe an dud ? Penaos e vez skeudennet an dañjer ? E lec'h ma vez tud e vez feulster (senenn e kêr gant gwarded ha soudarded, tagadenn er goadeg = liv ruz, arouez ar gwad, an ostilhoù implijet gant an dud zo lemm = heskennoù da bilat ar gwez, kontili da lazhañ al loened, h.a...
- ◇ Peseut skeudenn eus ar bleizi a vez roet deomp da welout ? Dre ar gweled (kengred, livioù skedus er goadeg, dre ar sonerezh (an arroud er goadeg par d'ur c'hlip video liv ar marzh ennañ), dre ar spered (barrek da bareañ, skiantoù ar c'hwesa hag ar c'hleved kreñvoc'h eget re an dud) h.a...

# DANVEZ

## A-zivout ar sonerezh :

Masterclass sonerezh ha sinema :

-<https://www.youtube.com/watch?v=xVVvwz-3LvQ>

-<https://www.cinezik.org/infos/affinfo.php?titre0=20211020181105>

## A-zivout ar genedouriezh, dielfennadur ar graferezh :

-<https://www.youtube.com/watch?v=jQYpoC9CvB4>

## Teuliadoù pedagogel all :

-[https://adrc-asso.org/sites/default/files/adrc/fichiers/dossier\\_pedagogique\\_le\\_peuple\\_loup.pdf](https://adrc-asso.org/sites/default/files/adrc/fichiers/dossier_pedagogique_le_peuple_loup.pdf)

-<https://www.grignoux.be/dossiers-pedagogiques-516>

Teuliad sevennet gant **Mathilde BOUREAU**  
(Hanterourez sevenadurel ha kenurzhier e Daoulagad Breizh)  
Troet e brezhoneg gant : **Mich Beyer**



**Daoulagad Breizh**  
13 straed Michel Le Nobletz  
29100 DOUARNENEZ

02 98 92 97 23  
[daoulagad.bzh@orange.fr](mailto:daoulagad.bzh@orange.fr)  
[www.daoulagad-breizh.org](http://www.daoulagad-breizh.org)